




Kaniri Breiz-Izel



Lenn Killarney



Editions TONTON PHILE

Imprimerie Louis Boclé, 40, Place Thiers, Morlaix

# Lenz Killarney

Moderato

EN TU ALL D'AR MOR DON HA D'AR

ME - NE - ZIOU BRAZ, WAR VOR- I DIG EUL LENN VI - HAN

GOM - PEZ, DRE AR GWE - NO - JEN - NOU GO -

LO - ET GANT BROEN GLAZ, ME A

IE - AS DA BOUR - MEN GANT MA MES - TRES

En tu all d'ar mor don ha d'ar meneziou braz,  
War vordig eul lenn vihan gompez,  
Dre ar gwenojennou goloet gant broen glaz  
Me a ieaz da bourmen gant ma mestrez.

Eno war vord eul lenn skler vel eur milizour,  
Dirazomp brasder noaz ar menez,  
Keit ma skrije skiltrus lapoused uz d'an dour  
Eun de ni ganaz eur son a garante.

Diou galonik iaouank ha daou ine henvel,  
Ne zonzont ket barz ar gwall amzer,  
Mez pa zeu 'neun tol krenn da c'houeza an avel,  
Ho disparti neuz kalz muioch a grizder.

Ar goanv kaled a ien a erruaz souden,  
Hag a zifframaz hon diou galon,  
Distollet a bep tu vel daou dammik plouzen  
Birviken mui na welimp an Iverzon !

TALDIR.

